

# P'edon war bont an Naoned (rond de Landeda)

P'edon war bont an Naoned *ge maluron lure (bis)*  
An deiz all o kanañ *maluron lurette*  
An deiz all o kanañ *maluron lure*

Me welas ur plac'h yaouank *ge maluron lure (bis)*  
'Hed ar stêr o ouelañ *maluron lurette*  
'Hed ar stêr o ouelañ *maluron lure*

Ha me c'houlenn diganti  
Na perak e ouele

Va gwalenn aour, emezi,  
Er mor a zo kouezhet

Petra 'rofec'h-c'hwi din-me  
Me 'yelo d'he zapañ

Hanter-kant skoed, emezi,  
'Roin deoc'h a galon vat

'Vit ar gentañ ploñjadenn  
Netra n'en deus gwelet

'Vit an eilvet ploñjadenn  
Ar walenn zo touchet

'Vit an drede ploñjadenn  
Ar paotr a zo beuzet

E dad a oa er prenestr  
A ziroll da ouelañ

Tri mab am-eus me ganet  
O zri ez int beuzet

E bered sakr an Dreinded  
O-zri e vint beziet